

# CANTIC

**EN ENOR DA ITRON-VARIA-AR-MENEZ**

**E parres Plozevet.**

TON : *Sant Joseph pried Mari.*

DISCAN :

O Guerc'hez, o Mam Jesus,  
 Varnom eus an envou  
 Grit eur sell trugarezus,  
 Clevit hor pedennou.

Dirac oc'h imaich santel  
 Oll barres Plozevet  
 A bromet beza fidel,  
 D'ho servicha bepret.

Deoc'h goude ar mission  
E zomp en em vouestlet,  
Hor c'halonou d'ho calon  
A zo bet consacret.

---

Da oll bugale Adam  
O guir mam-a c'hlac'har !  
E zoc'h deut da veza mam  
Var lein menez Calvar.

---

En draonien man a zaëlou  
Leun a dristidiguez  
Varzu ennoc'h gant clemou  
E c'hirvoudomp bemdez.

---

Guir sicour ar gristenien  
Hor sicourit, Guerc'hez,  
Enep an adversourien  
Eus hor silvidiguez.

---

Ar bed man, evel eur mor  
Leun a zangerou bras,  
A c'hourdrous en e fulor  
Coll ac'hanomp, siouas !

---

Ar c'hic hac an drouc-speret  
A glasq ivez hor c'holl  
Evit na vemp quet trec'het  
Pedit evidomp oll.

Pa zimp dirac hor barner  
O quittat ar vuhez,  
Bezit neuse, mam dener,  
Hor guir advocadez.

Goulennit digant ho Mab  
Peoc'h d'an Ilis cristen,  
Ha d'hon Tad Santel ar Pab  
Nerz, couraich, sclerijen.

E palez caër an Drindet  
Grit ma zimp da repoz ;  
Grit ma vimp oll curunet  
Eun deiz er baradoz.

*par M. J. Brignou* IMPRIMATUR :  
Corisopit. 13 Julii 1868.

EVRARD, *Vic. gen.*

---

Quimper, typ. de Kerangal.

*Guille*  
*1886.*